


SKAI



rowdoo

Setu amañ testennoù ha barzhonegoù 'zo bet skrivet gant skolidi skol ar Paraclet e Kemper, e lec'h ma 'maon o kelenn brezhoneg. Kement a blijadur o deus bet ar skolidi o skrivañ ar barzhonegoù-se, hon eus soñjet sevel ul levrig evit dastum anezho. Savet 'vo ul levrig all ar bloaz-mañ gant lod eus ar skolidi-se a zo c'hoazh er skol ha gant re all 'zo o kregiñ da studiañ brezhoneg. Un doare eo evito da lezel o roud er skol gant ar brezhoneg, ha trugarekaat a ran Per Denez en deus bet c'hoant da embann "Roudoù".

Liza THEPAUT

SELAOU...

Peoc'h...

Selaou trouz an noz...
Marv eo an heol 'barzh da vlev,
Brav eo da vlev fenoz.
Selaou an avel 'barzh an derv...

Chom tranquil amañ.

Bremañ, 'barzh an noz, sell eus ma dremm
'Pad ma 'z eus c'hoazh un tamm sklerijenn.
Sell eus ma dremm hag anal an hañv.

Peoc'h...

Selaou kan ar mor...
Disofjal a raimp ar vuhez.
Kousk a ra ar porzh er maez.
Selaou divaskell al laboused mor.

Chom tranquil bremañ.

N'eo ket dav bleñjal 'pad an noz.
Serr da zaoulagad, forzh penaos
E vo echu warc'hoazh ar c'hann.

Peoc'h...

Selaou ma c'halon...
Aet kuit war ar mor noazh
Evit beuziñ da anken vras...
Selaou... N'eo ket dav dit respont...

Anne-Marie D'Hervez
(Plodiern)

AR MOR

Me gar ar mor. Alies ez an da bourmen betek an aod. Hiziv emeon o vont da Zouarnenez. Pregiñ a rin c'hoazh gant ar pesketour kozh. E dud 'oa o chom amañ war an aod, hag e dad a oa pesketour. Pa oa yaouank e yae gantañ. Goude e yae e-unan. "Kalet e labouren da sevel ma bugale". Pell e yae er mor. Kalet e oa al labour. Ar bagoù ne oant ket bras.

Hiziv eo cheñchet an traoù. Ar mor n'eo ket mui ar pezh e oa. Saotret e vez gant ar bagoù bras ha lazhet e vez ar pesked. An traezhennoù a vez leun a vazout ha bep seurt traoù lous... Fin, karout a ran ar mor memestra. Mont a ran da bourmen war an draezhenn pe war ar reier e forzh pe-seurt amzer... Tu 'zo c'hoazh da hufvreal... ur wech an amzer.

*Geneviève Danion
(Ploneis)*

AR VUHEZ

'Kichen ma zi ez eus ur maner kozh. Un tenzaour a zo kuzhet ennañ. Paotr ar maner-se a zo ur mignon din ha pa oan bihan ez aen da c'hoari gantañ. Toullet hon eus kalz an douar met n'hon eus kavet netra, setu aze emañ c'hoazh an tenzaour. Laret eo bet e oa dindan ur mell fav. 'Blijet omp da c'hortoz e vefe marv ar wezenn neuze. Gwir eo hon eus seitek bloaz bremañ, setu omp deut un tammig re vras evit c'hoari gant an istorioù tenzaour.

Mont a reomp bremañ da c'hoari gant mignoned all, da vale asambles war ar maez. Ne chomomp ket e-barzh an tiez, moupañ a reomp eno e-touez an dud vras. Ezhomm hon eus fiñval, c'hoarzhin, redek : kemer a reomp hor motoioù, hag an tizh, an avel, al levenez a zieub ac'hanomp. Pa n'omp ket gouest da vont d'ober un dro e lec'h all, e lakomp muzik, muzik kaer evit en em adkavout e-barzh maezioù n'anavezomp ket c'hoazh, un deiz marteze...

Geneviève Danion

AN AMZER

War ar porzh emañ ar pesketour
Emañ e vont da veajiñ.
Kaer an amzer, glas ar mor,
Paneroù pesketour war an hent.
Kaer an amzer, glas ar mor,
War ar porzh ez eus ur pesketour.

Hag eñ 'n eus, ar pesketour, ur verc'h ;
Eviti eo tenn ar vuhez.
El labouradeg e oa Rozenn dec'h ;
Gortoz a rae an noz, un noz didruez
Kaer an amzer, glas ar mor,
War ar porzh ez eus ur pesketour.

Brav eo an heol en oabl,
Yaouank eo ar mor, kozh eo an den,
Ne ra ket glav war ar porzh,
Ne vez ket gwelet an amzer o tremen,
Kaer an amzer, glas ar mor,
War ar porzh ez eus ur pesketour.

Anne-Marie D'Hervez

AN EOST

War-dro ar bloavezhioù 1910 e veze dornet an ed, ar c'herc'h, an heiz gant ur freilh e-barzh ar c'hêrioù. Pa zeue an heol, merc'hed ha paotred, treid noazh, a skube an douar gant ur valaen balan. E-pad an devezh-se ar merc'hed ne lakaent ket o c'hoef. Ar baotred a lakae o zog evit diwall eus an heol tomm. Goude ma oa bet skubet al liorz, mestr an ti a zegase ar c'harrad kentañ, an holl dud a ziskarge ar bodelloù hag a zilase anezho. An duilhoù a veze ledet war daou renk war an douar. Ar pennoù a veze plaen tout. Un taol lagad diwezhañ, an dra 'oa prest. Bremañ e veze daou regennad paotred fas-fas. Unan a save ar freilh, diouzhtu goude e rae ar re all egistañ. Ar freilhoù a skoe asambles war ar pennoù ed. An taolioù kentañ ne vezent ket sur-tre, met goude o doa paket ar baotred an taol. Ar merc'hed a droe ar plouz evit lakaat ar greun da gouezhañ war an douar. Goude-se e kargent ar greun e-barzh ar seier. Da greisteiz e yae an dud, bihan ha bras, da zebriñ soubenn.

Un nebeud bloavezhioù goude-se ne veze ket dornet mui gant freilhoù. Ul labour start e oa. War-lerc'h ar freilh e teu ar c'hezeg-mezevenn. Pevar a veze staget eus ar c'hezeg-mezevenn hag ar re-mañ eus an dornerez. An dornerez a yae kalz buhanoc'h eget ar freilh. E-barzh ar c'hêrioù bras e pade pevar pe bemp devezh an eost. Pa veze echuet an eost e veze graet ur peurzorn bras : debriñ, evañ, kanañ, dañsal a veze graet betek ar mintin.

Janig Le Floc'h
(Pouldreuzig)

AN TREVAD

An trevad eo. Tomm eo an heol ha melen
eo an ed : ar greun a zo darev. An dud a
zo o labourat gant ar falz. Trec'hif a reont
ar c'horzennoù pounner ha bernañ a reont
anezho e-barzh ar c'harr.

Ar vugale a zo plijet. C'hoari a reont
e-barzh ar pradoù. Mont a reont e pep lec'h,
ar vakafsoù bras eo. A-benn kreisteiz e vo
debret merenn. Ar maouezed a zo o fardañ
ar pred. An daol a zo leun a draoù : bara,
amann, kig sall, avaloù-douar. Kalet eo ar
peurzorn met plijet eo an dud. Mat e vo an
eost ar bloaz-mañ. D'an abardaez noz, tout
an dud a yelo da zansal ha da evañ sistr
mat. Ar re gozh a gonto istorioù gwechall.

Nicole L'Hostiz

KAN AN NOZ

Trouz ar gwez o klemmusañ,
Plijus, istor an abardaez,
E-barzh ar bed bras ha du
Pedennoù an noz.
Mare iskis...

Tarzhoù 'zo o tont war an traezh
Ar mor a vann anezho
E-barzh an avel hep ehan ebet,
An heol 'zo beuzet ha
Ma spered a ya da heul
Hag a zans war an douar.

Janig Le Floc'h

Hanter kant bloaz 'zo ne oa ket ar vuhez ar memes hini e-barzh an tier ferm hag e kêr. An dud ne oant ket pinvidik. Ret e oa labourat start evit gounit ar boued. Ma poa ar boued e oa kaer. E-barzh ur gêr e tebr an dud patatez ha laezh alies ; chistr a oa da evañ, ne oa ket gwin e-giz bremañ. Ar sou-benn a veze graet gant bara du ha bara gwenn. Ur wech ar bloaz e veze lazhet an noc'h ; morse ne veze bannet un tamm. Tout an traoù a servije evit ober un dra bennak : gant ar gwad e veze graet gwadegen-noù. Anduilhoù a veze graet ivez hag e vezent lakaet a-istribilh e-barzh ar siminal...

Met n'eus ket nemet ar boued hag en deus cheñchet. E-barzh an tier ne oa ket tamm ebet e-giz an devezh hiziv. Douar e oa al leurzi, bremañ ez eus ur pallen leur. Ar mogerioù a oa livet met buan e vezent du gant ar moged a zeue eus ar siminal ; bremañ e vez lakaet paper a bep seurt liv war ar mogerioù. An dud a gouske e-barzh gweleoù-kloz hag en em domme gant an tan. E-barzh pep ti e oa bankeier kein evit azezañ. Plijus e oa an dra-se.

Ur wech ar sizhun e yae an dud e kêr da werzhafi o vioù, ha bep seurt traoù all c'hoazh, gant ar marc'h. Sur-tre ne oa ket kirri-tan. Evit labourat an douar ne oa ken kezeg setu 'oa lakaet un tammig mat amzer evit ober div wech netra. Gorroñ ar saout 'oa start ha ne ket atav naet e-giz bremañ.

Dec'h e oa e-giz-se... Ha 'benn arc'hoazh, penaos e vo ? ...

Janig Le Floc'h

Al labour eo hor buhez bemdeziek. Prederiañ war ar gudenn-se a zo pouezus-tre. Petra eo al labour ? En em zispakañ eo evit lod ; sklav e vez lod all eus al labour. Koulskoude eo trist e vefe al labour ken pouezus e-barzh ur vuhez, daoust ma vir chom hep ober netra. Kemer a ra gantañ an amzer hon eus da dremen war an douar. Amzer an dudi a zo berr, ha n'eus ket unan amzer da anavezout ar pezh a zo brav war an douar. En ur c'helc'h youllfall emamp, e lec'h ma rankomp labourat evit kaout arc'hant hag an dra-mañ evit gellout kemer perzh e-barzh an dudi. Ar gevredigezh a cheñch an den. Un dalvoudegezh arboellus eo, netra muioc'h, daoust ma kresk plas an dudi kenveriet da blas al labour.

Peogwir eo ganet an den, perak eo ret dezhañ gortoz pemp bloaz ha tri ugent evit gellout anavezout ar bed ? ...

*Katell Le Berre
(Kemper)*

LOEIZ POCH GLAS

Ur wech e oa un den anvet Loeiz Poch Glas peogwir en doa alies ur sac'h glas war e gein. Loeiz a oa ur marc'hadour madigoù, hag alies e yae da Gemper gant ur c'harr bihan, ur c'harr teir rod, da ger-c'hat madigoù evit gwerzhañ anezho goude-se. Gwechall e prene an dud ur bern madigoù asembles, e-giz-se o doa evit ober nell. Setu Loeiz o tont en-dro eus Kemper. Paseet Pluguen, drailhet starderez e garr bihan en ur ober un dro e-barzh ur foeneg. Spontet ar marc'h, strevet ar madigoù, un hanter eus outo aet 'barzh ar stêr 'oa dres e-kichen aze, paour-kaezh Loeiz ne oa ket gwall fier o vont en-dro d'ar gêr gant ken nebeut a vadigoù ha kement-se a dud o c'hortoz anezhañ evit prenañ madigoù gantañ...

Janig Le Floc'h

MA BRO DI'AN AN ERC'H

Bez eus bleunioù 'barzh an oabl,
Bleunioù gwenn 'giz an hufvre ;
Breizh 'zo o sellout eus an erc'h
'Koueet aze abaoe dec'h...

Brav eo kan an avel
War ar mor. He melkoni
Gag an derv hag ar gwez-tilh ;
Bleñjal a ra ar Mor Atlantel...

Bez' eus bleunioù 'barzh an heol,
Heol glas giz un hufvre,
Heol kozh 'giz ar pesketour,
Heol trist 'giz tout ar mor...

An amzer n'eo ket gwall domm,
Poan 'm eus em daoulagad
Gant an avel hag an heol
Met... Met c'hoant am eus da chom

Da chom da sell eus an erc'h gwenn,
An erc'h gwenn 'giz an hufvre.
'Barzh an oabl ez eus bleunioù,
Bleunioù gwenn 'giz an tarzhou...

Anne-Marie D'Hervez

MONT KUIT

Kuit emañ o vont
Pelec'h ? N'ouzon netra,
N'on ket kad mui
N'on ket kad
Digorifi ma daoulagad
War an druegezh
War ar paourentez,
N'on ket kad
Lonkafi an holl gevier,
Selaou an dud o krial
Pe gwelout anezho o n'em lazhañ.
Nann, gwelloc'h eo din mont kuit...
Met te, te 'zo yaouank,
Na serrez ket da zaoulagad,
Na chomez ket hep ober netra,
Na c'houzanvez ket an direizhegezh ;
Selaou da vamm o lavar dit :
STOURM
Me n'on ket kad mui,
Re am eus klevet, gwelet
Ha digemeret ;
Kuit emañ o vont...

Janig Le Floc'h

LEUV A RA AR MOR ATLANTEL

Ur vaouez war an traezh
'Savar gant an tarzhoù
A gomz gant ar maez
'Vleñj gant ar menezioù
Lefiv a ra ar Mor Atlantel
Ur sae wenn giz an erc'h
Daoulagad giz an nefiv
Koant tre eo ar verc'h
Gant he dremm leun a lefiv
Lefiv a ra ar Mor Atlantel
Heol 'zo vont da gousket
'Barzh ur mor ruz beuzet
Ar c'houmoul roz tapet
O lazhañ an heol kuzhet
Lefiv a ra ar Mor Atlantel
Ur vaouez war an traezh
'Vleñj gant ar menezioù
'Gomz gant ar maez
'Savar gant an tarzhoù
Lefiv a ra ar Mor Atlantel

Lefiv a ra ar Mor Atlantel

Anne-Marie D'Hervez

MOR

Bez' eus un tammig heol ruz
War an traezh
O redek
O klask mont war ar mor.
Ar mintin
'Zo aze,
An douar 'zo o tihunif.

Kreisteiz eo bremañ, ar mor
E-unan
A gan aze
Gant ur velkoni vras ;
Ar reier
A zo gell
Dindan daoulag an oabl.

Echu eo redadenn an heol
'Barzh an oabl
War an aod
Etre an holl bagoù kozh.
Martoloded
'Barzh ar porzh
A gan istorioù mor.

An heol a zastum e skinoù diwezhañ...

Roselyne Cloarec
Plouïneg

AN HEOL

An heol a vo amañ warc'hoazh,
Hag ur wech c'hoazh
E vo brav ha splann ar vuhez
Evidon.
Ar vuhez a garan,
Hag an dud ivez, marteze...

An heol a zo erruet hiziv.
Pep tra a zo nevez,
Goulou ha levenez
E pep lec'h.
Ar goañv 'zo o vont kuit,
Gounezet o c'hortoz...

Aet eo kuit an heol,
A-greiz holl.
Morse ne gompreno an dud,
N'eus ket tu da vevañ
Sioul ha laouen.
Morse n'em bo ma zamm heol.

Heol a oa dec'h,
Glav a zo hiziv.
An avel a zisec'h an daeroù,
Gantañ e pase an eñvorennoù.
E-giz ar goumoulenn, e-giz an delienn,
Pelec'h emañ an heol ? ...

Roselyne Cloarec
(Pleheneg)

GORTOZ

Dec'h e oan bet o wel un den kozh,
Ni 'n eus komanset ur gaoz.
A ! Plijet 'oa o wel ac'hanon, Jos,
Ni 'n eus komanset ur gaoz.

Kontet en deus din bleunioù Breizh,
Bro ar gwez ha bro ar frouezh,
Ha bravoc'h eget an Antilhez,
Llorzh arc'hant war ar maez.

Hiziv, me zo bet o wel un den kozh.
Kontet em eus dezhañ kan ar porzh,
Damber emañ ar Vretoned bemnoz
Amañ, dirak ar mor o c'hortoz.

Kontet en deus din kousk Breizh,
Ha kemeret en deus un alc'houez
Evit mont kuit dirak ar vuhez.
Evitañ e oa echu an deiz.

Hiziv eo marv an den kozh
'Kichen ar mor da hanternoz.
Atav 'mañ Jozig o c'hortoz
Ur vuhez all a-dreñv an noz.

Anne-Marie D'Hervez

AR MOR

Poent eo mont da gousket,
Barzh an oabl n'eus steredenn ebet.
Dous eo an avel, hag al loar
A ziver war ar mor, he c'hoar.

Pe plijus eo c'hwezh ar foenn.
War an aod ez eus traezh brav, gwenn,
Dec'h e oa ar mor e fulor,
An houlen a gont din e istor.

N'eus ket bet kalz avel abaoe,
Ar merc'hed a bed an Aotrou Doue :
Ur martolod 'oa war ar mor,
Al loar 'zo kousket war an dour.

He ostaleri 'zo du.
War an dour un heol ruz,
Barzh an oabl steredenn ebet
Poent eo mont da gousket.

Anne-Marie D'Hervez

AR C'HOULZ AMZER

Setu an nevez hafv, ar c'houlz amzer brav
An heol hag ar wrez a zo erru
Dihunif a ra ar plant
Ar bleunioù a zigor o daoulagad
Reif o frouezh a ra ar gwez
Geot al letonenn a gav he liv kaer : glas
Fardañ an neizhioù a ra al laboused evit digemer
O re vihan
Ar mare eo da vont da bourmen war varc'h-houarn
Pe war droad war an aod ha war ar maez

War e lerc'h e tegouezh an hafv
Splann eo an amzer, glas eo an oabl
Hir e vez an devezhioù, brav e vez an aer
N'eus ket skol. Ar vakañsoù eo evit ar vugale
Neuze e vezont o c'hoari en o liorz e bleufv pe
War an draezhenn,
Pelec'h e vez touristed o tommheoliafi eus ar mintin
Betek an noz
Ar mor a bed anezho da neual en e zour klouar
Gant ar mare, o tiskenn hag o tistreif, e flour
Traid an hafvoùrien
Hag an hafv a lez trist e blas d'an diskar amzer.

An avel a foet ar gwez
An delioù a vez o kouezhafi war an douar
En diskar amzer e vez avaloù, mouar, per, frouezh
A bep seurt
War ar maez, e ya ar vugale da bourmen
Hag e teuont en dro gant chakodadoù
Avaloù ha paneradoù mouar,
Kavout a reer mat ur vouarenn diwar ar c'hleuz
Ur berenn diwar ar wezenn

Hag adarre e tistro ar goafv
Louet eo an oabl
Ar c'houmoul a dremen en oabl hag a zegas ar glav
Ar goafv a zo hefvel ouzh an hufvreoù fall
Leuskel ar vro a ra al laboused
An heol ez eont kuit da glask
A-wechoù, an douar a wisk e vantell erc'h
Ar bleunioù a vez o vervel

Ar bloaz a zo echu.

Paour kaezh laboused mor
C'hwi 'zo tout o vont da vervel
E-kichen an aod 'barzh an dour
N'oc'h ket kad mui da nijal

Ha c'hwi paour kaezh gwez ar mor
Pe brav e oac'h
Hep an dour du
A zo tont da lous' o c'hoarezed eus an Arvor

Ken divalav eo aet an draezhenn
Penn ar bed a zo trist
Tout ar Vretoned 'zo o yudal
O bro ken brav a oa gwechall

Ar besketaerien gozh azezet war ur bank
N'eus droug 'barzh o c'halon
O sellout eus ar mor
A roe dezho kalz plijadur araok

Ha c'hwi hag a zo e penn ar vro
Peus ket graet nitra evit ar Vretoned
Sur a-walc'h a peus traoù all da ober
E giz mont e vakañsoù e Courchevel.

MINTIN HANV

Seizh eur eo marteze, n'ouzon ket,
Gwelout a ran an avel vor,
Mil kadañs, avel chañs.
Gwelout a ran ar vag o vont kuit nell
N'ouzon ket ha dont a ray en dro.

Seizh eur eo marteze,
Gwelout a ran an avel douar
A gas kuit greun ar bleunioù
Hag a ziskenn neuze war ar mor,
Hag aze e varvont,
Ha ne vez gwelet netra mui.

Claire

ENVORIOU

Soñj 'm eus eus ar veilhadeg e korn an tan,
Pa gonte din ur bern istorioù brav.
Soñjal a rae dezhañ e oan maleürus,
Ha gwelout a raen e-barzh an deñvalijenn
Goulou splann e zaoulagad
A lufre e-giz ur melezour.

Neuze e kompreni
E oan eürus
En e gichen e korn an tan.

Aline

AR MOR

Ar mor 'zo glas hiziv,
Ha marteze e cheficho liv 'benn arc'hoazh.
"Tout an dud 'zo o sell eus outoc'h
Hag eus al laboused mor war ar reier.
C'hwi 'zo brav gant ho reier distummet,
Pa 'z oc'h sioul pe fuloret."

War an aod emañ ar c'hrugell-verien.
"An douristed 'zo estlammet dirazoc'h,
Kouronkañ a reont, rouzañ a reont, pourmen a reont.
Gellout a reont gwelout an heol o vont da gousket
ennoc'h,
Gellout a reont mont warnoc'h gant ar vag,
Da besketa pe da bourmen."

"N'oc'h ket mui
Abae ma 'zo chomet war sec'h an "Amoco Cadiz".
Ar reier 'zo du,
Ar pesked, ar bezin hag al laboused a zo saotret
pe varv.
Paour kaezh mor, tout an dud a saotr ac'hanoc'h,
Hag an dud n'o deus ket mui doujañs evidoc'h."

Marie-Renée

KOUMANANT DA SKRID

Anv.....

.....

Chomlec'h.....

.....

.....

Adalek an niverenn.....

Kasit ar follenn-mañ, gant ho chekenn 30 lur, da :

P. DENEZ
Ri, Floaré
2910C DOUARNENEZ

Studian a rit ar brezhoneg ?

Neuze lennit

HOR YEZH

I22 niverenn embannet dija

yezhadur - lennegezh pobl - istorioù
buhez - geriadurioù - pennadoù dibabet -
istor ar yezh - yezhoù keltiek all -
hag all ...

Koumanant 40 lur evit 4 niverenn
CCP Denis , I499-5I Rennes
Per DENEZ , Ri , Floare
29100 DOUARNENEZ

Nevez-embannet

e BREZHONEG EEUN
(I200 ger hepken)

ROPARZ HEMON :

RE BENNAVEL .
UR PRENESTR A OA DIGOR ...

Embannet gant SKOL

Yola CHARIOU , 16 rue Hector Berlioz
22.000 SAINT BRIEUC
CCP Skol 2616-33 Rennes
I2,00 lur

Priz al levrig-mañ : 5,00 lur.

Embannet gant SKRID
adniverenn 15
Rener : Gwendal DENEZ
Priz ar C'houmanant : 30 lur
Chomlec'h ar sekretourva : Per DENEZ, Ri,
Ploare, 29100 DOUARNENEZ
Diskleriet hervez lezenn
Niverenn CPPAP :
Moulet ez-prevez
Miz Du 1978

